

25

CANTIC

VAR AR BLASFÈMOU.

Var ton : *S. Pér, pe Cloarec Plunet.*

ESTONET ê va c'halon, ar bleo a sev em pen,
Me sonch din ne zon pelloc'h e bro ar gristenien,
Troublet e zê gant horeur ar mel eus va esqern;
Me a gred e zon aru en qichen an ifern.

Langach commun ar vro-mâeo alleodouet,
Dre bere ec'hataquer nep an neushon c'hrouet;
Ne glêvomp bemde nemet execrationou,
Blasfêmou an hormpla, imprecationou.

Tri vrang a neus ar viç-mâ : ar c'henta aneze
A choq an Otrou-Doue, a vless e Vajeste;
D'an eil an Touer-Doue en em laz e-unan,
Dre an drede e souhet mil mallos d'an nessan.

Maliç ar blasfèmatour a ya betec an ên;
M'en deffe ar buissanç e tistruchfe Doue :

E deod a zo ur sabron en ifern lérimet,
Evit laqat a beziou hon Zalver beniguet.

Ar blasfèmatour a dle bea comparajet
Evit é gonaſion ous eur c'hi arrajet ,
Penni en e furor en em strinq da guenta
Var e vestr d'en devori ma na el harz ounta.

Goas è ar blasfèmatour évit ar re daonet ,
Pere , a fonç an ifern , a zisloaq bep momet
Mil mallos ha mil blasfèm a enep o c'hrouer ,
A garfe en distruja , ma ve en o fouer.

Ar pez a alum ounta o haz hac o maliç ,
È ma tiscarg varneze oll rigor e justic ;
Mes an Touer malheurus a choq e vajeste ,
Pa recev e faveuriou gant liberalite.

Pez mepris évit Doue d'en qemeret da dest !
Evit goaranti eur gaou e vez galvet prest.
Difennet en eus ousimp , dre an eilgourc'hemen ,
Da lycononci e hano , na d'en touet en ven.

Me gred on arru' are en toues ar Judevien ,
Pere a eirvoues commun gant furor hac anqen ,
A c'houlennas ous Pilat condaoni o Roue ,
Pa glevan ar gristenien o touet maro Doue .

3

C'hoas e clevan gant eston cals a dud alies
 O renonci da Zoue, en qær ha var ar mæs ;
 Rei a reont d'an diaoul var Doue preferanç :
 Pebez mépris da Zoue ha pebes dismeganç !

Pêr a renonç da Jesus, ebqen a ben teir gues ,
 En ti ar Pontif Caïphas , gant aon rac ur vâtes ;
 Neuse zon e sortias da voela e bec'het ,
 Ha pelloc'h e zaoulagad nîn qet bet disec'het.

Te , blasfèmatour impi , e teus bet renoncet
 Mil ha mil gouech da Jesus , eb na so sortiet
 Biscoas un daqen daërou demeus da zaoulagad ;
 Ret ê e ve da galon insansibl hac ingrat.

D'an eil, an Touer-Doue so dean e-unan
 Un tirant hac u Bourreo , demeus ar c'hruela ;
 Dont a ra da exerci , ep caout truez ebet ,
 Var e gorf , var e ene , ar brassa crueldet.

Mar be tam contrariet , e clever anea
 O hervel neuse souden an tanfouelt d'en grilla ,
 Armi a ra e enep an oll elemanchou ,
 Souheti a ra d'e gorf ar brassa tourmanchou

Souheti a ra d'e gorf supliçou temporel ,
 Ha d'e ene e souhet supliçou éternel ;
 E varn a ra gant rigor , ne glasq qet e esperm ;

4

Goul a ra ma vo daonet e creis punç an ifern.

Barner cruel hac injust, ne da qet re vuan ;
Qent condaoni da ene , laqa da vis en tan ,
Ne oufes qet en lezel ebars un heur ebqen :
Penos e hilli padout en ifern birviqen ?

Un dre pini am eston eo an dallidiguez
Démeus an Touer-Doue , pa zaon e ene qez ;
Rac ne glasq en e bec'het profit na plijadur ,
N'er gra nemet dre arrach ha dre eur valiq pur.

Attira ra varneàn malheuriou eternel ,
Ouspen a aru gantàn goel golliou temporel ;
Rac ar Scritur a lavar , na vo james e di
Hep santout abers Doue ar voalen a gasti.

Mes hoarvout a ra gantàn vel gant a re daonet ,
Nonobstant o oll boaniou, nenen amandontqet.
Quercouls an Toner-Doue a chomo obstinet ;
Biqen mechant evit poan na guita e behet.

An obstineta peher a so ebars er bed
Pa êru gantàn ar maro a guita e behet ,
Ar mevier , an impudiq , ar muntrer , ar forban ,
Na goutinuint qet ato ar sort viçou en tân.

Mes ar malheürussa eo an Touer Doue ,
A rei goude e varo evel en e vue ,

Hennes a gontinuo , pa vezo er bed all ,
Enpad an eternite e langach ordinal.

An Touer-Doue eta en em laz e-unan ;
Mes entuont ar re-all a so goas anean ;
Rac dre e leodouet e hatir var e vro ,
Coler Doue , e venjanç , ha cals a valheurjou.

Pa voa guechal sant Rober Roue demeus
a Franç

O pedi an Otrou-Doue er gær a Orleanç ,
Da zistrei diyar ar bopl eus e Rouantelez ,
An diou voalen a gasti , ar brezel , ar g'ernez.

Ec'h apparissas dean Jesus en e beden ,
Hac a lavaras dean ne alje birviqen
Bea exocet gantan , na cayet e houlen ,
Qeit a ma soufrje en Franç ar blasfèmatourien.

Qerqent m'en doe ar Roue clèvet comzou
Jesus

E eure prest publia un arret rigourus ,
Dre bini ec'h ordren ma vije bet toullet
Teod ar blasfèmatourien gant un ouarn goret.

Ma rafe ar varnerien o harg erve Doue ,
E rafent executi ordrenanç ar Roue ,
Pehini a fell dean ma vezo grêt ur squer

Deus an Touer-Doue, dre ursupplie ponner.

Enfin, an Touer-Doue, dre e voaf pedennou ,
A dransgres en e goler ar sacra lezennou.
Manqout a ra d'e Zoue, souheti d'e nessa
An horrupla malheuriou da goea varnea.

Mar deus grêt dean ur c'holl, un domach ,
aroscur proces ,
Cresqet ebars en taillou, bet den ous en laères,
Neuse e pedo gantan mil malediction ,
An diaoul hac ar gonnar da grignat e galon.

Pà ra an Touer-Doue e bedennou euzus
A enep e adversour , d'en renta malheurus ,
An tol en deus avizet a retorn varnea ,
Hep ober drouc d'eguile , e teu d'en em laza.

Eur vam , elec'h corriagant rêsôñ e buguel,
A deu dre anipontamant , eb rêsôñ da c'hervel
An diaoul d'en cass gantan. Perac, mam dinatur,
E res-te ur sort souhet d'ar paour qes crouadur.

An tadou hac ar mamou so Touerrien-Doue ,
A zisqo d'o bugale al langach-se ive ;
Mes qent evit finissa , selaouit un histoar
Pehini so rapportet en scrijou Sant Gregoar.

An diaoul a anlevas a dre divrac'h e dad

Ur buguelic a bemp bla (sellit en pe sort oad!)
 Pini a rē blasfemon goude bea disqet
 Gant e dad ha gant e vam c'hoas n'cnem amand.
 qet.

Banissomp-ta d'an ifern an oll leodouet,
 Evit meuli da vijen nep a neus or c'hrouet;
 Evit goude m'or bezom meulet var an douar,
 Mor bezo an avantach d'en meuli en c'hloar.

EN ENOR SANT PÊR,

PRINÇ AN EBESTEL.

Var ton : *Me oc'h ador, va Jesus, etc.*

OTROU Sant Pêr beniguet Abostol eürus,
 C'houi a so bet an discipl ha mignon ha Jesus,
 Intercedit evidomp, ni ho ped a galon;
 N'oufac'h qet ou refusi, rac c'houi so hor patron.

Ni so pec'herien ingrat, pec'herien obstinet,
 Memes da gomzou Doue-ealonou caledet;
 Hon c'houstianç so carguetapepsort pec'hejou,

Rac-se ez omp afflijet gant pep sort miserion.

C'houi oc'h eus grêtpinijen da vea renonçet
Jesus hon Mestr, hon Hrouer, hon Salver
beniguet

Roit ive d'ou daoulagat eur sourcen a zaerou,
Da voela ba detesti da james hon c'hrimou.

C'houi a so en deliçou, c'houi a so curunet
Assambles gant an oll Zent ha gant an oll Elez;
C'houi a so brema contant, c'houi a so eürus,
O velet, o contempli hac o meuli Jesus!

Ni a renonç d'ar pec'het, ni a rai pinijen,
D'ar bed ha d'e vaximou ni a renonç a gren;
Intercedit evidomp, ma vezimp en repos
O velet ive Jesus e creis ar barados.

FIN.

E Montroulez, eus a Imprimeri LÉDAN.